

B E I L H A D E G O U

1 9 6 0

oooooooooooooooooooooooooooo

1.

DIVIZ ETRE AN DOUR HAG AR GWIN

Ar gwin

Penaoz e kredez tremen ken lorc'hus dre ar ster ?  
Ne soñjez ket pegement ec'h out eun dra dister ?  
Me eo am eus digarez da gemer eun tamm gloar  
Pac'h on brudet ha karet, dre holl, war an douar.

An dour

An drivet de eus ar bed oan krouet gant Doue;  
Anavezet ha klasket c'h on gant an holl aboe,  
Goulou a ran ar lodenn vrasañ eus an douar,  
N'em eus na ment na muzul, ma nerzh a zo dispar.

Ar gwin

Na pa ves anavezet 'vit kerzet ha mont pell / kerzet  
Na te a zo eur muntre ! Nag a dud 'teus beuzet  
Elec'h me 'zo didamall, arru mat gant an holl,  
Pegen laouen 've an dud pa ven-me war an daol.

An dour

Mar deo gwir on eur muntre, 'te 'zo eun torfedour;  
Kalz a dud a zo marvet n'eo ket eus evañ dour;  
Diouzh trinkañ re alies 'deus breinet o skevent,  
O charrat re vras kargoù o deus torret o fenn.

Ar gwin

Bet o defe plijadur 'pad ma vent oc'h evañ  
Gwelet 'vijent o c'hoarzin, o vlagal, o kanañ,  
Lec'h a re ya d'ar feunteun da derriñ o sec'hed  
A chom tefival o fennoù, eun druez o gwelet.

An dour

Ar re a ya d'ar feunteun o deves plijadur,  
Ne gollont ket o skiant, chom 'reont koant ha fur,  
Elec'h an everien gwin 'goll o fenn, hag o fri  
'Deu da vezañ pikotet ha ru evel sivi.

Ar gwin

Ganin e renki tevel, kaer az tevo gwinkal  
Ha chom e-pad an amzer ez traoñienn da ruihal,

2.

'Deui ket da frikotañ ganin-me war ar maez,  
Na da di ar vourc'hizien; laket 'vefes ermaez.

An dour

Me 'c'h ay ganit d'ar c'hestell, koulz ha d'an tiez plouz  
Na ret 'vo kê ac'hanon da walc'hiñ an treoù loue.  
Ha pa ven klasket ivez, c'h an da lazhañ an tan,  
Te chom ez kourvez er c'hañ ha ne rez ket a van.

Ar gwin

Neuze on heñvel ouzht, mac'h on-me didalvez; ouzht  
'Vez ket a dan da lazhañ bemdez dre c'hras Doue,  
Lar din petra' rez neuze, ar rest eus an amzer,  
Me'gred e vez koulz ha me alies dibreder.

An dour

Kas endro ar milinoù, sikour ar c'hoñversoù,  
Digas 'ran marc'hadourezh 'n eur dougen a lestroù,  
D'an dud e vagan pesked, ha reiñ ane 'vit mann,  
Te ne vez ket eun den nemet evit arc'hant. // rezvez

Ar gwin

Komzet ez teus awalc'h eus da vadelez hou  
Ganin-me e kleve c'hoazh komz eus da dorfejoù;  
Nag a wech, war a larer, 'teus dismantret kêrioù  
Nag a wech ez teus ivez bet beuzet trevajoù !

An dour

An trevad ne savfe ket ma vefe met sec'hour,  
Nag an dud nag al loened n'hallont bevañ hep dour :  
Setu perak e peder ma Mestr ha ma c'hrouer  
'Vit ma teuin da gouezañ/dre holl, bep an amzer. gouezhan

Ar gwin

C'hoant 'm eus e vefe hemañ er c'hrogad diwezañ,  
Kaer 'teus, ne dislari ket ac'hanon er wech-mañ,  
Me 'zo kentoc'h evidout da vihanañ en iliz  
Gant ar beleg'ven laket bep beure er c'haliz.

An dour

Me ya er c'haliz ivez, ken alies ha te,  
Hag er sakramanchoù all ne ve nemedon-me :  
Gant ar gwin nan eus biskoazh, kaeroc'h 'zo ne vo ket,

3.

Badezet na benniget na graet seurt vad ebet.

Maria PRAT, Brelevenez.

ME OAR HADAN PATATEZ ...

Pa oan ganet e oa roet din eur skudellad patatez ha laez,  
'N eur laret din: Debr! hennez eo bevañs an dud diwar ar  
maez, Ha ma'z te c'hoant da derc'hel da gaout patatez da  
vevañ, E vo ret dit abred mont da sikour an dud da hadañ.  
Me, eme ma zad, a diskoe dit penaoz hadañ patatez: Er  
kreiz-tre bep tamm e lakeñ hed da votez... Ha setu ar  
c'hanfard eun devez, o vont da glask fred Da gostez Loua-  
neg, da vro ar patatez abred, En eur laret: " Me raio  
diou lodenn. Hañ! Aze avat emañ an taol! Eun hanter lo-  
denn er park, eur lodenn hanter ouz an daol. 'N em werzet  
e oan! Sell 'ta, emeze, pikous fall! Karz pelloc'h da  
glask labour e lec'h all... E oan o vont pa arruas a-benn  
din an Aotrou Maer: " Deus du-mañ, emezañ, hag e vi be-  
vet mat ha paeet kaer. Me 'm eus ezhomm tud, rak krog eo  
ganin ar labour vras. " Hañ! Ya, eno oa eun diframm seurt  
'm boa gwelet biskoaz. War ar solier e oa eun dousen gwra-  
c'hed koz O trailhañ patatez, adalek ar beure betek an noz.  
Ha c'hoaz 've laret ne ra ket Doue ken a vuzudou? Geo,  
me gred, pa ro patatez 'n o fez diwar dammoù. O tostaat ka-  
sedoù de e oa pemp pe c'hwec'h mous, hag o kas d'ar park  
nao pe dek marmous, Eur vandenn werzed gant peb a draktor  
oc'h ober roudennoù, Hag eur vandenn all o sklabeziñ 'n o  
leiz a wano. Ar park 'oa hir ha ledan, er c'hreiz eur var-  
rikenn win, Pep hini 'c'h ae da evañ pa gare gant eur chopin.  
Pa'm boe evet eur sklopad, ha me da hadañ patatez, ha da  
lakaat etre pep tamm hed ma botez: Ken oa manet digor o  
genoù gante da sellet ouzin, N'oa ket unan en Louaneg kap  
da c'hoari ganin. " Hañ! Hemañ, emeze, a oar ped eur 've  
pa son ar c'hreisteiz. - Ya! 'mon-me, unnek eur hanter  
sonnet, eun hanter eur a vez ". Deut oan da vezañ petr  
yaouank ha tapet ar vrud Da vezañ dorniet mat, ar c'hen-  
tañ eus an dud. Arru oan zoken war ar poent da dimi d'eur  
bennerez, Ne oa ken etrezomp nemet hed ma botez. Met eun  
devez m'boa jachet ar c'harr war ma c'hein Ken oa darbet  
din bezañ brevet a daolioù mein, Pa oa konvers ar patatez  
o vont da digeriñ E oa laret din eur beurevez gant mestr

8.

an traou gant an Diaoul. Ha St Pêr o huchal warnañ:  
" 'M eus aon ec'h eo pare da danvez-tan! " Ha  
Krapik, pa 'n deus klevet mouez St Pêr, o skeiñ e  
forc'h pellañ ma 'n deus gallet dioutañ, hag o sevel  
e ziwaskell d'an nec'h: " Sell 'ta! emezañ, piw 'zo  
arru amañ! An aotrou St Pêr eus ar Baradoz! Pebez da  
enor e rit-hu din-me, o tiskenn amañ betek va c'has-  
tell? " - " Perak, eme St Pêr, eur c'hastell res-te  
gant hemañ ma nen out ket diaes te da servijiñ en  
kestell, daoust petra larfes-te ma welfes ar Baradoz  
neuze. " - " Un draig bennak ho peus da c'houlenn di-  
ganin memes-tra, pa oc'h deut betek amañ, Aotrou St  
Pêr? " - " O! N'em eus ket ezomm kalz tra. Un diaoul  
bihn da lakaat a zindan ar gador-sarmon du-hont en  
Iliz Ploubêr. " - " O! Ma n'ho peus ezomm ken, ho po  
unan... Amañ ne vank ket a seurt-se, me a ya da  
c'hervel un toullad, hag e kasfet ganec'h an hini a  
garfet ".  
Hag an Diaoul koz da c'hervel aneze hag eur van-  
dennad kanfarded oc'h errudout en ur voutañ, 'n ur  
skrijal, evel diaoulien, ken n'en devoa mez o zad  
dioutê, hag e lavare: " N'it ket, Aotrou St Pêr, d'  
ober van o welet se. Ar re-mañ a zo bugale savet fall.  
" - " O! Ne oan ket en sorc'henn da gaout a seurt all  
amañ ivez 'vat! ". Bepred o reiñ trouz e c'houlenn-  
ont: " Piw eo hennez, da betra eo deut amañ? " -  
" Roit peuc'h 'ta, marmouzien, eme e zad, 've ket la-  
varet hennez dioutañ, peogwir ec'h eo an Aotrou St  
Pêr eus ar Baradoz, hag a zo deut da c'houlenn unan  
ac'hanoc'h da vont da souten ar gador sarmon da Iliz  
Ploubêr. " Ma raent trouz araok, neuze e raent avat.  
" Me yelo! Neket te! Ya, me... " Tout o devoa c'hoant  
da vont da Bloubêr. " Ac'hanta, eme St Pêr, peogwir  
ho peus kement-se c'hoant da vonet, it da welet pe-  
lec'h ho peus da vont ha goude-se e welfet. Arabat  
'vo deoc'h dont da lavaret ne blijfe ket deoc'h. " Pa  
oant losket da vont war araok, m'ho pije gwelet a  
neuze, memes tra evel ur vandenn saout pennfollet. Ne  
oant ket bet pell oc'h ober o zro; trist e oa o gwelet,  
tout e oant o welañ hag o lavaret: " Me ned in ket  
eno, Na me ivez, Na me kennebeut, eme un all " -  
" Hola, hola, eme o zad, ve ket graet evelse d'an dud,  
Pa'm eus lavaret reiñ unan da St Pêr, e vo graet, me

9.

gemando... Ha ma n'eo ket mat evelse deoc'h, me ya da den-  
nañ plouz-berr, hag an hini a digouezo dezhañ a yelo ".  
Ha tennet plouz-berr, ha digouezet da Ludovik. A! Hennez  
bepred ne c'houlenne ket mont. Gwinkal a rae, ober 'rae  
trouz: " A! Me he vin ket evit dougen ar gador-se, honnez  
a zo ponner ". - " Perak, perak ? Eme an Diaoul koz, vi  
ket gouest da zougen honnez? Sell 'ta bremañ. Beleien ga-  
tolik a ve laket diw pe deir barrouz deze war o chouk ha  
ne lavaront netra vit-se; Ha te neuze evit dougen ur gador  
sarmen a ra ur chare a seurt-se ? Me ya da ober dit-te ur  
pred friko hag a savo nerz dit-te, ha te zougo ar gador  
se evel netra. " - " Perak, ma zad, emezañ, friko ? " - "  
Ya, friko lavaran-me ive ". - " Arabat 'vo dih-me dibri re  
a friko araok mont eno, me 'm eus sellet ha disellet pa  
on-me bet du-hont, n'em eus gwelet plas ebet da vont a  
gostez eno, mar tebran re din da gaout poan em c'hof, pe-  
naos rin-me dirak kement all a dud ? " - " Ro peuc'h. Par-  
rouz Ploubêr a zo ur barrouz vras; tud pinvidik enni, hag  
e vo prenet dit peadra... Ha neuze skriv d'ar gêr gwech  
ha gwech all, berroc'h 'kavi an amzer ha me ivez. " Ha se-  
tu aet an Diaoul bihan dindan ar gador sarmen.

A-benn ur pennadig goude en devoa bet a dad ul lizer di-  
gantañ, hag e lavare dezhañ: " O, va zad, emezañ, amañ a zo  
ul lec'h a boan, Me 'zo bec'hiet ewar va chouk; ha gwasañ  
devez em be da sul; aze 'zo dour benniget, pad an de o  
strinkañ, takenn pe dakenn a gouez warnon. Ha se dev, va  
Doue! se dev. " - " Sakre biez, eme e dad, 'm eus aon ne  
chomo ket hennez du-hont. Neuze 'm bo mez avat. "

Nemet a-barz un tullad bloaveziou goude en deus skri-  
vet adarre al lizer-mañ muioc'h laouen. Lavaret 'rae : "  
Bremañ e koman san 'n em blijout. N'eo ket ken ponner ma  
bec'h ken. Me 'zo sur, ar gador-mañ a oa graet gant koad  
glaz, derc'hel 'ra da skañvaat. Ha neuze tout an treoù a zo  
a du ganin. Pa oan arruet amañ e oa eun aotrou Person ken  
ponner hag ur roc'hell. Ac'hanta ! bremañ, da c'hraz Doue,  
a zo deuet unan all en e blas a zo skañv evel ur blouzenn.  
" - " Añ! eme ar Paotr koz, chom a ra ma mab du-hont".

An drede lizer a oa arruet ivez un dro bennak. C'hoant  
en devoa an Diaoul koz da welañ dimeus hen lenn. " Va za-  
dig ker, emezañ, bremañ en em blijan amañ. Me 'm eus des-  
ket kalz a draou amañ avat. Ma c'hatekiz, tout dre an ef-  
vor, o ya ! hag ar gousperoù ivez, nemet ne 'm eus ket a  
droet da ganañ. Dimeus ur perz all em eus konsolasion. Rak

10

tout ar brezegeerien hag a dremen war va chouk, a la-  
var memes tra. Dreist-holl e lavaront : An neb a raio  
pinijenn a yelo d'ar Baradoz. Ac'hanta, va zad, me  
avat am eus arri graet kalz a binijenn amañ... hag a  
gredan ec'h eo arrou va zro da vont ivez d'ar Baradoz.  
Ha marteze ec'h an-me da ober trubuilh deoc'h, met  
peogwir ne c'hallan ken lavaret gevier, e lavaran  
deoc'h ar wirionez, birviken ken ne distroin d'an  
Ifern, gwell ve ganin bezañ daonet. Ludovik ".  
Yann Flour.

Yann Flour.

#### Ar Bikierien vein

An dir a gan war ar vein kalet, - Klemm ar vegin -  
An dir a gan war ar vein kalet, - Mouez an anne.

Bro ar lanneier, bro ar vein kaer - Bro an Dolmaon -  
Bro ar lanneier, bro ar vein kaer - Pikierien vein.

Dindan ar glav, hag an holl amzer - Labour ar maez  
Dindan ar glav hag an holl amzer - Ouz troad ar c'hrec'h.

Ar vein 'zo gleb, an houarn sklaset - Rew en aezenn,  
Ar vein 'zo gleb, an houarn sklaset - Dacuarn skalfet.

Kerreg en enk, an eil ouz eben - Juntrou bihan  
Kerreg en enk, an eil ouz eben - Sko war ar yenn.

Ret klask an tu, ret mat klask ar feilh, - Son ar  
gizell, - Ret klask an tu, ret mat klask ar feilh,  
- en Breiz Izel.

Kerreg ponner evit tud dister - Harp ar varrenn  
Kerreg ponner evit tud dister - Tourioù ken kaer.

Diskañ begañ ha diskañ an tremp - Sko war an tomm,  
Diskañ begañ ha diskañ an tremp, - Tap ar gevell.

Lintret ar min, an traouilh o treiñ - Tenn ar gordenn,  
Lintret ar min, an traouilh o treiñ, - dont raio war



11.

benn.

Ouzh krab ar c'hrec'h, dindan o lochenn, - war benn o  
glin, - ouz krab ar c'hrec'h dindan o lochenn - Pikierien,  
vein.

Loeiz Teurnier, eus  
Pleuveur-Bodou.

oooooooooooooooooooo

AN HINI A OAR DAOU LANGACH A DA LVE DAOU DEN...